

**Naig Rozmor: Eur Mister joaiuz (1977; Orthographie: Falc'huneg)**

Euz peleh ta 'teu ar c'hoant iskiz  
A darz em hreiz  
Pa harpez war va zellou da zellou?

Euz peleh e teu ar skrij  
A red dindan va hrohenn  
Da heul da vizied ouz va floura?  
Hag ar gliz, dre guz, ouz va ferlezenna?

Petra 'm laka klañv ha terziennet souden?  
Petra 'ra da hinkinou va divorzed tridal?  
Petra 'ra din alteri etre da zaouarn?  
Ha skei war va fenn  
Hag en em rei, o pegement!  
Hag en em renta d'az faltazi?

Med, perak klask kompren?  
Evel ma tiskenn an heol er mor digor  
da hada eun deiz nevez,  
Deus da honid ganin eun eost a joa.